





TAKZB

WVQ



TENNET ez eus bet  
100 SKOURENN  
A 1 DA 100



Kasit ho lizhiri da  
RONAN JOLAIS -  
40 RUE de BRETAGNE PARIS.

P a j e n n o ù d a a d l e n n : Maz eus bet ul lovr a zlefe bezañ  
anavezet gant pep emsaver yaouank,  
"Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh"  
an hini eo. Peadra da brederiañ  
zo el linennoù da heul da skouer :

"Ma vije chomet Breizh digabestr, hevelep kont a vije bet ganti, hevelep kont a vije bet ganti. E-lec'h bezañ mouget gant sevenadur Bro-C'Hall he dije tanvaet un tamm eus holl sevenadurioù ar bed, o c'hou-nit bemdez pinvidzhioù nevez, hep koll tamm ebet eus he broadelezh. Evel Danmark pe Holland, da skouer, awenet e vije bet tro-ha-tro gt broioù an hanternôz, ar C'Hornôg hag ar Reter, ar C'Hreistez. Loezon Bro-C'Hall neuze a vije bet madelezhus peogwir ne vije ket bet re vras : pinvidikaat he dije graet hor sevenadur-ni e-lec'h e zistrujañ. Bet e vije evitañ evel evit ur blantenn an heol hag ar glav. Bremañ avat eo Breizh evel ur blantenn losket gant an heol ha nreinaet gant ar glav."

Roparz HEMON.

!!

Nend eo ket c'hoazh achu istor hor Bro : lec'h o deus c'hpazh Breizhiz d'ober brud. Deomp-ni eo da gendere'hel en hent market doomp gant hor gourdadoù ha d'ober burzhadoù evelte mar gallomp.

Skrivet e vo ivez ar pezh hor bc-ni gwraet, mat ha fall evel ma vo, hag hor bugale var hol lerc'h har c'haro, hon istimo, pe hor c'haso, hon disprizo, hervez ma vezimp bet Breizhiz mat pe fall, evel ma karomp-ni ar re o deus gwraet vad hag enor da Vreizh en amzer wezharall ha ma tisprizomp ar re a zo bet fall pe zisleal en he c'ha-ver.

ISTOER BREIH

ISTOR BREIZH p. 368.

!!

Mar lezit ho Prezhoneg da vervel, kent pell goude e tiskennoc en hevelep bez hoc'h anv hag hoc'h enor a bobl.

Dihunamb !

Mervel gant enor a zo gwell eget bevañ gant mez.

Takitus

Me lavar hag a lavaro : Keit lammo va c'halon em c'hreiz, yezh va zud kozh, me az karo.

Fañch an UHEL.

Me droc'ho va zeod em beg kent dizeskiñ ar brezhoneg.

Brizeug.

Pennad diwar ul lizher da Frouez VALLEE (8vet Eost 1934) :  
(Mevn MORDIERN, Prederiadennou, V, 47, Gwalarn, niv. 86)

Mantrus paourentez ha treuter ar mennoziou gant ar skrivagnerion vrezhonek. Leun eo ar bed a skouerioù dispar evit an heni a gemer ar boan da glask, skouerioù hag a hell bezañ evidomp ur vammenn dihesk da nevezin ha da greskin hon nerzh. Hag an dud paour-se ne c'houzont nemet randonin atav an hevelep traou, traouigoù divlas bet lavaret nouspet gwezh dija! Ur grak-vuhez n'eo ken! Hogen n'eo ket dre grak-vevañ, dre vevañ-vevaik e vo salvet ar brezhoneg. Evel m'en deus lavaret R. HEMON, ret eo lakaat ar pep gwellañ, ar pep pouesuzañ, ar pep nerzhusañ a zo er bed da vont e-barzh ar Brezhoneg, ret eo ober eus hemañ ur yezh veur a sevenadurezh, ur yezh hollvedel a sevenadurezh. Ret eo ma vefe kavet ennañ ar pep gwellañ eus mammennou ar Gouzout, ar pep kaerañ eus ar skouerioù roet deomp gant an dud diouzh an dibab o deus beveter broioù all. Netra ne dalv war hillig ar skouer! A-hend-all, evel m'am eus lavaret va-unan, arabat kemmeskañ proviñsiadegezh ha breizhadegezh. Ar proviñsiadegezh (da lavarout eo strizhded, enkded an dremmwel) a zo ur mouglec'h ma varvo ennañ ar vreizhadegezh. Dieubiñ, digarc'hariañ ar vreizhadegezh a zo ret!

-----  
PennadXXXI - AL LAKAAT-DA-DALVEZOUT.

D'a r vrezhonegerion yaouank (1) da aozañ dre o oberoù danvez d'ar pennad-mañ a vo skrivet gant istorourion an amzer da zont. En o galloud emañ treiñ penn d'ar vazh hepdaleha prientiñ danvez-danevelliñ fonnus ha frealzus. N'eus nemet sevel ur ratozh start (1), stagañ ganti diouzhtu, hag en em varrekaat d'al labour dre labourat, hervez ar c'hiz a-vepred.

(1) islinannet ganeomp.

-----  
UNYEZHAN AR VRO

Ar pal pell eo hennezh, hogen ivez ar Pal dreist ma tle tennañ davetañ holl strivadou ar vrezhonegerion, ar Mennad Meur a dle enaouiñ ha kalonekaat ar stourmerion evit ar Yezh. Sellout ar rannvroioù bet kollet gant ar brezhoneg abaoe an XI-XII vet evel kollet da vizviken evitañ, plegañ ma chomfe da vizviken ar brezhoneg kaaliel er c'hornioù a Vreizh-Izel m'emañ o krak-vevañ hiziv, kement-se a vefe krouiñ en-dro d'ar yezh un aezenn-voug a bellafe dicuti an holl dud tuet dre natur pe dre zeskadurezh d'an embregerezhioù meur. Stuzerezh mat ar yezh en amzer da zont a c'houlenn start ma vo labouret dizehan-kaer dalc'hmat da ledanaat, da ec'honaat, da greskin ar rannvroadoù tud o komz brezhoneg evit ma vo suraet mui-ouzh-mui da hemañ, dre un handon fonnusoc'h-fonnusañ bemdez a yezherion, an niver dereat a skrivagnerion en deus ezhomm da deurel sked evel yezh a sevenadurezh war holl dachennou ar Gouzout. En ur Vro vihan evel Breizh, re eo kaout div yezh war un dro. Unan eus an div a dle bezañ skarzhet kuit, ha n'eus ket ezhomm da lavarout amañ ez eo ar galleg a rank bezañ kemeret da oan an Aberzh.


N'eo ket hepken ledañ hag astenn ar brezhoneg war c'horre ar Vro a vennan lavarout dre ar ger-se, hogen e uhelaat ivez, dre zigeriñ dezhañ, war maeziou ar Gouzout, kement tachenn a zoret d'ur yezh a vremañ he fleustriñ evit bezañ e gwirionez ur yezh a sevenadurezh. Berrweleion pe zalleion, hag a gri forzh bewezh ma saver e brezhoneg estr eget gwerziou, soniou, pezhioù-c'hoari ha sorbiennou evit ar bobl, a ankounac'ha n'eo ket ar bobl-se evit mirout he yezh anez e teufe da labourat ha da ober gwardoniezh en he c'hreiz ha war he zro frammataerion ha sternataerion boblañs kenyezh dezhi. Hogen n'eo ket gant marvailhoù, pezhioù-c'hoari ha kanaouennoù hepken e c'heller magañ ar pep uhelañ hag ar pep kreñvañ eus an dibabou-tud-se-dazont. Bouedoù all a zo ret d'ar spered ha dre-se ne ziwanint biken ma ne gavont ket er yezh-mañ meuzioù speredel diouzh o blaz ha diouzh o ezhommoù. Ec'hon-meurbet eo a-hend-all maeziou ar Gouzout, ha gw-all-zifur e vefe disprizañ an tachennou izelañ anezhañ. Ken talvoudus da vuhez ar Yezh e vefe, da skouer, ul levr-kegin skrivet aketus e brezhoneg reizh hag ul levr-studi war ar gevredadouriezh. Rak gant al levr-kegin e vefe tizhet ur rummad lennerion (pe lennerezed kentoc'h) a vanfe diziraezus d'an eil levr.

-----

UNVANIA, UNYEZHA, KRESKIÀ

Un daolemm labour homezh a c'houlenn, evit bezañ kaset da vat, obererion ha neket lavarerion, labourerion ha neket leñverion, unvanerion ha neket me skerion ha rendaelerion. Braster ha Kaerder ar Paliou da dizhout a die bezañ lakaet da devez, er c'halonou lec'hiet-mat hag en eneoù uhel, an dizunvaniezhou mantrus pe heugus a sav diwar an emc'hloar anoazet ha karantezioù trevariet ouzh ar ramyezh-mañ-ramyezh pe ouzh an doareoù-skrivañ warlerc'hiet, gallekaet pe fall-hentet en ur c'hiz pe c'hiz. Ar rendaelegoù diwar-benn an doare-skrivañ a ra, abaoe ur c'hantved, brasañ levez e nebourion ar brezhoneg, ha n'eo ket hep abeg, rak ganto e vez kollet amzer ha nerzhioù a vije gwelloc'h lakaet da draou talvoudusoc'h. An dud a nebeut a spered pe a nebeut a zeskadurezh a zo techet da goll o amzer gant mibiliachoù a savont da benn-gredennoù a feiz, nemet n'eo ket e rafe diouzh o skouer an dud all. Istor ar saozneg hag ar galleg a laka anat n'en deus an doare-skrivañ pouez ebet nag evit ar mañ nag evit ar fall e buhez ur yezh. O doare-skrivañ fall ha warlerc'hiet n'en deus ket miret ouzh ar saozneg hag ouzh ar galleg da zont da vezañ yezhoù bras a sevenadurezh, yezhoù hollvedel, komzet, ar saozneg gant kant hanterkant milion a dud, ar galleg gant eizh ka draou-ugent milion. Lakaet kenverha-kenver gant doareoù diskiant an div yezh veur-se, doare-skrivañ ar brezhoneg unvan a zo ur burzhud a aoster hag a sklaerder...

... Bez'ez eus e brezhoneg nevez ur ger kaer a lavar muioc'h eget ar ger gallek kenster dezhañ : E M G E N R E I Z H eo ar ger-se, ar genreizh a zo war un dro an emreizh, an heni en em sañ an unan dezhañ, hag ar genreizh, a ra d'an unan kenoberiañ gant ar re all. D'ar vrezhonegerion a danvay kened ar ger ha kened an traou a zo dindanañ, d'ar re a ouezo ober dioutañ, e teuy an nerzh hag an trec'h en un doare ken diarvar ha ma teu an heol warlerc'h an noz : "BUZ HA BUHEZ" evel ma veze youc'het e brezhoneg kozh.



(Pennad roet ez-hegarat gant  
"Er GUENEDOUR" )

Lies ec'h eus bet savet pennadoù - e galleg pe e brezhoneg - en enor da Janed Flamm ha neoazh ec'h anavan-me re yaouank n'o deus ket biskoazh klevet komz anezhi. Nag un druez ! Evel ma lavaren e niverenn ziwezhañ "Ar Gwenedour", Breizhiz n'anavant ket Istor o Bro; penaos e c'hellfent ober a-ratre Istor an amzer-vremañ pa n'anavant ket Istor an amzer dremenet.

Er XIVvet kantved, Breizh a oa ur Vro distag-kaer diouzh ar broioù arall. Pa oa marv an Dug Yann III (1312-1341) lesanvet "an den mat", e savas ur brezel fall hag hir etre Breizhiz. Rak daou zen a venne bout Dug war Vreizh. Ha peb-unan anezhe a gave e oa ar gwir gantañ.

Karl BLEZ a oa dimezet da Janed PENTREV, nizez da Yann III. Karl a oa ur c'henderv da Roue Frañs hah hennen a savas a-du gantañ.

Yann VONFORZH - ha ntervreur (lezvreur) da Yann III - a oa dimezet da Janed Flandren. Roue Bro-Saoz - enebour da Heni Bro-C'Hall a reas dorn dezhañ evit disoc'h gant e soñj.

Bourc'hizion Naoned a anavas Yann VONFORZH evel Dug Breizh. Ha Yann a yaas da glask trezol (teñzor) an Dugelezh chomet e Lusignan.

O welout kement-mañ, Yann Vonforzh, harpet gant e wreg, an heni en doa "kalon ur gwaz hag hardizhted ul leon" evel ma lavare ar skrivagner gall FROISSART, a valeas dre Vreizh a-bezh hag a voe anvet evel Dug gant razh(holl) an dud e kêrioù damani an Dugelezh. Er c'hontrol, baroned vras Breizh, 2/3 a Vreizh-Uhel hag 1/3 a V.-Izel a savas a-du gant Janed Pentrev. 2 eskob hepken - nav a oa neuze e Breizh - a harpas Yann Vonforzh. Hennen a sinas un emglev gant Edwarzh II, roue Bro-Saoz. Filip VI, roue Bro-C'Hall, a zivizas e Conflañs e oa Karl Blez gwir Dug Breizh. An Tad Santel ar Pab - Benaed XII - ne lavaras ger.

E-tal Naoned (1341), e voe lazhet pe c'hloazet a-vil-vern tud Yann Vonforzh. Daou gant Naonedad yaouank a chomas etre daouarn ar Frañsizion. En amzer-se, evel ma welit, tud Naoned ne lavarent ket e oant Frañsizion!

Yann Vonforzh a c'houlennas ar Peoc'h. Hag eñ da Baris gant fiziañs e lealded Dug an Normandi a oa a-du gant ar Frañsizion. Roue Bro-C'Hall, displeal en e geñver, en taolas er prizon. Daou vloaz e chomas eno. Na pet gwezh emañ bet c'hoariet evelse gancomp. Na pet gwezh emañ bet displeal ar Frañsizion en hor c'heñver ! Gwad ar Vrezhoned, a-c'houde m'emañ bet staget hor Bro ouzh Bro-C'Hall, en deus redeta-lies evit salvedigezh ar Frañs. Evit lavarout trugarez deomp, petra 'vez gwraet ? Ne vez ket roet labour d'ar Vrezhoned en o bro. Grataet e vez deomp ul "lezenn-stur". Deuet eo un den anvet mat da lavarout deomp "al lezenn-stur ne dal da netra"... ha ni ivez moarvat! Splann erwalc'h eo ar c'homzoù hag ar fedoù : ar Vrezhoned ne dalont da netra. Ha perak enta ez omp lakaet da vout Frañsizion mar ne dalomp da netra evit ar Frañs ? ...

JANED FLAMM ne oa ket Breizhadez, savet e oa a Vro-Flandren. Tabut a zo bet, nend eus ket c'hoazh gwall-bell zo, etre Belgiz a gomz galleg ha Flandreniz a venn lakaet o yezh war an hevelep paz-

enn gant ar galleg. Radio evel kazetennoù o deus komzet erwalc'h 5  
diwar gement-se.

Janed Flamm - e-pad ma oa he gwaz etre daouarn ar Frañsizion ne chomas ket gant he foan. Gervel a raas he zud da zonet da Wenod ha da lec'hioù arall. Diskouez a raas dezhe he mab - 2 vloaz en doa hennen neuze - ha goulenn gante dorc'hel gant ar brezel. O wclout ar vamm o tiskouez dezhe he c'hrouadur, brezelourion Yann ne cant ket evit o c'huitaat. Kemeret e voe gante Gwenrann ha Redon, div gêr a oa kouezhet etre daouarn Karl Blez.

Roazon - a oa difennet gant un den kalonek, Gwilhaou Kadoudal - a gouezhas eñm veli Karl goude ur seziz hir. Hennen a c'hronnas neuze kêr Henbont, ma en em gave Janed Flamm. Honnen ar-~~varc'h~~ a yaas a ru da ru evit kemmerzhat he zud. Ar maouezi zoken entanet gant he c'homzoù nerzhus en em lakaas da sikour ar soudarded.

Un deiz, 300 brezelour ganti, Janed Flamm a yaas er-maez a gêr, a entanas teltennoù tud Karl Blez hag a yaas a-herr betek Alrae. Chomel a raas eno un deiz bennak a-raok distreiñ dan Henbont hep gouzout da arme Bleiz.

Dre ar Blavoz (gl. Blavet - Gw. Blaoc'h) - ne oa ket grommet gant soudarded Blez - ec'h arruas lestri Bro-Saoz da reiñ dorn da zifenn-erion kêr. Karl a voe dav dezhañ monet kuit (Mezheven 1342).

Met ar brezel a badas pell c'hoazh gant meur a arsav, evel ma oa an akoustumañs (boaz) en amzer-se. En Alrae (29 a Wenngolo 1364) e voe an emgann diwezhañ. Karl BLEZ a gavas ar marveno. Janed PENTREV a c'houlennas ar peoc'h evit brasañ vad ar Vro.

AbEnnez.

ALIENN : dalc'hit soñj ez eo bet savet ar pennad-mañ o  
brezhoneg Ereg (pe Gwenedeg) hag evit ar Werin.

=====+++++=====

PENAOB OBER UR VLEUNVENN ?

Kemer : pri-stummañ, paper-liv, skarzhdentou.

Ur c'hran pri-stummañ 2 cm e dreuzkiz ha 5 cm uhelder a yel d'ober korzenn ar vleunvenn. Lakaat anezhañ en e sav war an daol; hag e kreiz ar penn anezhañ sankañ hanter ur skarzhdent.

Evit ober an deliennou-kalir, troc'hañ ur steredenn c'hwec'nskourrek en un tamm paper gwer. Ober en he c'hreiz un toull 1 cm e dreuzkizenn. Lakaat an deliennou-kalir war ar gorzenn.

Troc'hañ goude en un tamm paper liv kel (liv flamm) an deliennou-bleunvenn. Ober un toull e kreiz ha lakaat an deliennou-bleunvenn war ar re galir.

Ober an dared (pe ar stuc'heg) e stumm ur jarlig hag e sankañ war beg ar skarzhdent.

Goude e vo gwraet ar gofioù o lakaat bouligoù pri-stummañ war beg ar skarzhdent. Sankañ ar skarzhdentou e lodenn ar pri-stummañ a weler c'hoazh etre diazez ar stuc'heg hag an deil-bleunvenn.

Ar vleunvenn beurwraet, e vefe mat astennañ ar gorzenn gant ar bizied hag he flegañ un tammig.

=====

Nevez 'zo, e-kerzh un devezh-studi war an Eskimoed hag an Indianed, e Skol-Veur Laval, e KEBEG, e tisklêrias an Aotrou Jacques ROUSSEAU kement-mañ :

"Ar gelennadurezh roet gant an dud wenn d'an Eskimoed ha d'an Indianed a zo bet ur c'hwitadenn. Bez' ez eo bet ouzhpenn ur c'holl amzer hag ur c'holl arc'hant reiñ dezho skolac'ion, tud ha n'anavezent ket o yezhoù.

"An Eskimoed ha g an Indianed a zo kouskoude Kanadianed evel an dud all. Ha poent eo diskar an treuzkredennoù hon laka da soñjal ez int tud izeloc'h evidomp. Treuzkredennoù evelse o deus kaset da get ar renadurezh-stad estren er broioù trevadennet. Ne dleomp ket reiñ d'an Indianed ha d'an Indianed ul lodenn-vro hag herzel outo d'en em zeskiñ, na kennebeut o rediañ da blegañ d'ur sevenadurezh ha n'eo ket o hini, met o lezel da choaz ar yezh hag ar relijion a fell dezho gouzout.

"Ar gele madurezh roet d'an Eskimoed ha d'an Indianed a dle bezañ divyezhek : ret e vefe deskiñ dezho lenn ha skrivañ en o yezh ha da c'houde e galleg pe e saozneg, hervez ma'z eo hini pe hini eus an div yezh-se an hini ar muiañ komzet er c'horn-bro ma reont o annez ennañ. RET EO D'O YEZH CHOM EVITO LODENN BOUEZUSAN O SEVENADUREZH. N'hon eus ket ar gwir d'o rediañ da zilezel yezh o c'havell : unan eus reolennoù-diazev Gwirioù an Denelezh n'eo ken, mirout o yezh d'an Eskimoed ha d'an Indianed.

"Ret e vefe eta krouiñ hep mui gortoz skolioù e-lec'h ma tesko ivez an danvez-kelemerion komz ha skrivañ an eskimoeg hag an Indianeg. Gwelloc'h e vefe c'hoazh stummañ kelemerion pe eskimo pe indian a c'hellfe kelem en o yezh."


Pa gompren kenkoulz ar Ganadianed C'Hall kudennoù sevenadurezhioù broadoù bihan Kanada, daoust ha perak ne fell ket d'ar C'Hall-aoued kompren hon c'hudennoù-ni, Bretoned ? Daoust ha n'eus ket bet graet, ha ne raer ket gwashoc'h deomp en hon bro hag e raer d'an Eskimoed ha d'an Indianed e Kanada ? Ar pezh a zo mat evit un Indian pe un Eskimo, perak ne vefe ket mat evit ur Breton ?

Ivona KONAN.

- 
- Lakait er-maez ar c'hi-se, gwleb-teil ha lous-brein eo.
  - Ur c'hi emolc'h eo, heni va noter.
  - Ar c'hrak-Aotrou gant loarigoù bras war e fri, mourennoù louet dindan e fronelloù ha tok-pod ouzh kostez e benn hon eus j kejet gantañ ?
  - Dres! Petra 'soñjit diwar e benn ?
  - E gwirionez, m'am befe arc'hant, n'her fizifen ket ennañ.
  - Disfizius ez oc'h ! Marteze n'eo ket brav da welout, hogen va c'hredit mat e c'heller lakaat e fiziañs ennañ.
  - Sellit aze, piv eo an den kofek-mañ ?
  - Ne welan den !
  - Re ziwelzhat! serret en deus an nor warnañ.


AR RENEREZH N'EO KET KIRIEK EUS AR PENNADOÙ EMBANNET.

---



An avel a c'hwezhe e blev Lena.  
 Eus a lein ar menez bremañ,  
 E veize-hi e vro dezhañ.  
 Neuze e kounas gweli an disparti.  
 O dromm enkrezet, 'vel m'edod,  
 Hag an daeren a-hod e jod.  
 E-harz he zreid e kutuilhas,  
 E gwasked flour ur radenn,  
 Kleier mouk ur vrugenn den.  
 "Kae buan, gwennilienn skañv,  
 Ganit kleier mistr ar vrugenn,  
 'Vel ur bedenn, d'hen dizoaniñ."

I. K.



Petore darvoud istorel a zo kuzhet dindan al lizherennoù-mañ :  
 aaaaaa, ccccc, d, eeeee, g, h, iiiiiiii, lll, mm, nnnnnnnn, ooo, p, q,  
 rr, e, ttttt, uuuu.

Setu amañ penaps e tleer lenn :

"ANNULO CINGITUR TENUI, NUSQUAM COHAERENTE, AD ECLIPTICAM  
 INCLINATO ;i. Gronnet eo d'ur walek skañv, nann peget outañ, ha  
 stouet war ar c'helc'hdrova (ecliptic).

Bonn skrivet gant HUYGENS, an heni a gavademmas gwalenn SADRUM  
 (1959). Tri vloaz hepken warlerc'h e tisleegas ster e rinluniok...

---

Me n'am eus bet tamm d'am e'hoan  
 Nemet ur grammpouezhenn hag unan,  
 Ur grammpouezhenn hag unan hanter,  
 Ur grammpouezhenn ha teir hanter,  
 An heni domm, an heni yen,  
 Hag an heni dostañ d'al lien.

Respont : OI.

- 
- Hurlinkot em eus an noz-mañ.
  - E petra ?
  - Rezet em eus e oan Norvegat.
  - Kon skrijus-se e oa ?
  - Sur a-walc'h, n'ouzon poz norvegeg ebet.
-



G o u l l o n d e r   h a g   H u r l i n k

gant Gwennacl HELOU.

An aod. Lanv da nav eur.

Kanibl dirak an heol, a-lark-meur. Nivleñ war vor.  
Perak ez eo dav ma vehe kuzhet handon ar vuhez e-giz-se, tra m'on  
trist a-holl-viskoazh. Nend eo ket drev ar vuhez evit an heni a zlo  
divroañ. Dal 'ta, ne voe gwezh ma soñj e oa ken kann an draezhenn  
amañ, pe ez eo ma daoulagad a gemm al livioù.

Diskoachañ a ra iliz vihan an Aotrou Mikael Noblezh, a-hont. A-bonn  
dezhi ec'h an.

Petra a reont amañ, an estrenion-se ? Ha n'em eus ket ar gwir bout  
ma-unan war an erin ? Me zo a'r vro, me, ha skoemp 'vel ur pouch.  
Kan un ec'hwider, kollet en oabr.

Me 'vez trist, trist. N'hell ket bezañ muioc'h a loes ennon. Perak  
ec'h on damani... C'Hwi a vehe plijet bras ouzh her gouzout, neketa;  
se a ambuzhe mat ac'hanoc'h, â zen dozh ! E walc'h en divije ho kiv-  
ioulder hag e leverhec'h... Nam ouzhin hepken e sell se. Ogn a ran  
ouzhoc'h.

Reeleveziek 'ta!

C'Hwi a c'horto ur gofesion, garmoù enkrez, gouelvan.

Nann, n'ouiot ket. Ma arvellaat a rit nemetken. Ma doan eo. Paour-  
kaezh rin... Nag eo plijus gwelout pegen on em gever en parfot. N'  
oan nemet ur boulomig naontek vloaz ! hag endev, evel evit ar wezh,  
e c'hoarier an enkrezeion, ez ardaouer dirazor : levezon zrougob-  
erius ul lennegezh vrein-linkr ha nreinidik hag ho lez da grediñ ema-  
omp un dra bennak, hon eus kudennoù, seim mantrus evit morloc'h ur  
spered youst. Sipañ a raer e vez da wignavaoù.

Ma daerennoù a zo azv hogen ne linkont ket, eien a zour lank em lag-  
ad. N'int ket ponner a-walc'h. Pe neuze, nend eo ket meur erwalc'h  
ma dizeur evit sevel daerennoù divent, enno kevatalder ma avantur.  
Kouskoude diduet bras e vehe o ouelañ : n'em eus ket henn gwraet  
abaoe ken hir amzer ! saroù tev, c'hwek, c'hoalennek da, klouar,  
gwleb, lart, krenn a heuilhhe antoù ma divoc'h hag ahe da goll da  
gorn ogleñn ma diweuz rok. Zoken e c'hellhen o c'hlucañ.

Perak e namjod ar gael amañ ? Sur, dre maz endonjod an  
dachenn, e zonregjod, kleuz meur gwenn en erin. Lazhañ a raer ar  
park fu, n'ez eus ker ar gwir ! Arabat oa mengleuziañ amañ. Divalav  
eo er gwelva. Ac'h, ket ken kennañ ar gwelva-he : un nebeut a dan-  
iennoù-traezh, un nantennig sot, boutin, ledok, monk en ur ger.

Ez-duac'h n'eus den amañ ? Mont a reont a bell ar re eroll.  
Aiaou ! Broudañ 'ra 'n askol ! Pelec'h emañ 'ta an draen ?  
Che ! Mailhemous eo ma biz troad. Nann, pas lous, nend eo metken  
marv, 'c'honvat. Ur verionenn 'dremen war va gar og.

Sed eñ ! â zraen drougoborius ! Ma ivin levn a gleuz daou  
irvig kann war ar groc'henn lêrek. Roufennek-glez eo ma oefs gwec's.

Sortial a ra 'n draen, kazugel ha lemm; jagudiñ 'ra em  
sell skoelf; heñvel pakret ouzh ur meltaz skalfet.

Tristidigezh... Nebeut hor bourr dre ma nebuta hon dalc'h.  
Netra, nikun a spir deomp. Ni 'vev el lab gant c'hoant bout en ti.  
Tristidigezh, hen gilee start, da ankouact em boa tra ma furchen ma  
biz troad. Hogen ez out amañ, ma zarodañ a rez; stir eo va ene dir.  
Kozh keveiled omp, ei ?

Da ven ec'h an ? Marteze e rin ul luz bennak dre 'r jimbl-  
va, ma n'em eus ket al lure d'henn ober.

Laka evezh, skilbaotr, amañ 'z eus feilhañs ! An daoudroa

a zlehe kaout daoulagad : dober mat o deus ma re; n'int ket jurdik. Kur !!! Bremañ-souden e tremenin du-se. Un arallvro a Vrest war a gredan, nann, sur on en deus faltaziet e tiwanhe gwez amañ ! Krin- ennoù 'zo. A-hed mor Uz ! War aod ar peñseoù, erion an Ankoù !

Doue ! nag ez eus traezoù war ar c'hro !

Foe ispisial an iod en aer, krefvoc'h, krefvañ.

Kiomp da welout pezh a du ar c'hurz. Galzomp. Marteze e kivin un dra bennak a zudius. 'Vel n'em eus mann d'ober... Keneve ergarzhañ ma enkrez. Mar gouehen nemetken pe evit tra ez on damani ! Goulenn ken ponner ha nouch... Gloev razh ar respont.

Spes ur vag ouzh an dremmwel, a-raz : mogod bronnek, em- roltet. Ur brezellestr, a-dra-sur. Hewel razh a-wezhoù.

Che ! n'eo ket ken aes-se bale war ar bili ! Antreal a ra a-fuilh ar jimbl em arc'henad; dleet em bije lakaat ma re nevez : kofignonoù-sport a-zoare. Kozh eo ar re-mañ, ket kement ha 'm doan droch.

Doue ! nag e flaer ar pesk kreviet-mañ ! Ul levneg. Eñ ivez a vevas. Gwell e vihe bet hel lezel da verdeiñ eget hel lakaat da vreinañ. Diot eo mab-den ! Al loened a lazher, lazhed, lazhor, evit ket ha netra. Me a anavez reoù 'zo a zebrje al levneg-se, pa oa bev-buhezek, yac'h-pesk, fresk da nebeutañ. Ar pesk a garan, ur gwir serc'h. Pa glaskan an drein, ne soñjan ket mui e draen ma zristidig- ezh nevet.

M'em eus dleet ijinañ ma melre groilh. N'eo nemet un em- zalc'h a boell pe ur boaz, ur bad hirbad. Met un hande gwirion ne lavaran ken. Ken eeun eo ar vuhez evelato.

Monet da 'r gentel, debriñ, mezviñ, kousket, sklankal, c'hoarzhin; merc'heta un tammig da 'n degouezh. Hogen ez eo ken diz- arvoud : atav an hevelep tra. Plarik e teu an onglenn.

Breizhiz a vez iskis a dud, her gous en-da. N'eus nemet lenn ar paperennoù touristikel. Bez'ez eus kouch anezho er Maison de la Bretagne, l straed an Disparti, war a gredan. Bremañ ez eo ken pell Paris; hag hepdale e vin ken nes da'r gêr nay-he.

Amiotaus eo esaeañ kounañ chomlec'hioù pe niverennoù tele- fon. Netra 'zedennus er c'houmon dolmet-se. Nemet marteze al leog jestrek-se, siwazh, atav ar memes re, gant o fifil gadal.

Stlak ur gwag. Huan an eon. Koun spil an hilli kras war zivuzell sec'h.

Horos ur c'hloc'h. Chalkiñ 'ra 'h hin.

Glas-louet gwleb an oabl... Avelig...

Strak ar gwag... Strap... Oriav diginkl, gerc'h ha rac'h- oanus.

Fifv va c'horf gaoloc'h ha moanardek edan an heol meizh. Emlazh ma meiz.

.....  
Ha trist ec'h aspignan war-du an erin.



Petore darvoud istorel a zo kuzhet dindan al lizherennoù-mañ :  
aaaaaa, ccccc, d, eeeee, g, h, iiiiii, lll, mm, nnnnnnnn, ooo, p, q,  
rr, s, ttttt, uuuuu.  
(Sellout pelloc'h...)

Taolenn Steregi ar Mizioù

Steregi ar Mizioù a gaver war 16 derez lodred en-dro d'ar c'helc'h drova (ecliptic). Ramnet e c'hell bout ar c'helc'hiad steregi e 12 kevrenn a 30 derez bep a stereg dezhe. 12 arouez ar Mizioù hon cus eta

Pop miz ez cus unan cus an arouezioù-se a-dreñv d'an heol p'omañ e sevel. War-dro an 21 meurzh ez eo an Tourzh; ur miz goude ez eo ar Maen-Forn.

Arouezioù an Nevezamzer	: Meurzh	: 1	Tourzh (g.)
	Ebrel	: 2	Maen-Forn (g.)
	Mae	: 3	Gevelled (l.)
Arouezioù an Haf	: Mezheven	: 4	Legestr (l.)
	Gouhere	: 5	Leon (g.)
	Eost	: 6	Gwerc'hez (gg.)
Arouezioù an Diskar-amzer	: Gwengolo	: 7	Mentel (gg.)
	Here	: 8	Krug (gg.)
	Miz Du	: 9	Saezheg (g.)
Arouezioù ar Gouañv	: Kerzu	: 10	Gavr (gg.)
	Genver	: 11	Skuilhoù (l.)
	CHwevrer	: 12	Peskoù (l.)

(roll savet dw. skridoù kozh)

Stered renkot diouzh nerzh o sked

	: Amzer e dilec'hiadur pellañ :		Lec'hiadur
	davet an Norz pe ar Su		en Norz pe ar Su
Stere	: 20 eur	: 22 eur	: diouzh heni an heol
	Miz	Miz	da greistaiz
GOURC'HI	C'Hwevrer	Genver	10° S
LESTR	C'Hwevrer	Genver	40° S
GOURVARC'H-a	Mezheven	Mae	80° S
TELENN	Eost	Gouhere	30° N
KARRIGELL	Genver	Kerzu	70° N
GHEOUR-Arzhig	Mezheven	Mae	0°
RASTELL-a	Genver	Kerzu	10° N
GOUGI	C'Hwevrer	Genver	20° N
ERER	Gwengolo	Eost	10° N
RASTELL-b	C'Hwevrer	Genver	20° N
SUKROAZ-a	Mae	Ebrel	80° S
MAEN-FORN	Genver	Kerzu	40° N
GEVELLED-a	Meurzh	C'Hwevrer	30° N
GWERC'HEZ-Telchienn	Mae	Ebrel	30° S
ERUG	Gouhere	Mezheven	50° S
SUPESK	Here	Gwengolo	20° S
ALARC'H	Gwengolo	Eost	40° N
LEON-Roueig	Ebrel	Meurzh	0°
SUKROAZ	Mae	Ebrel	80° S
GEVELLED	Meurzh	C'Hwevrer	30° N

"Roit din an danvez hag e savin deoc'h ar Bed" (KANT, 1755)

"Diogel eo ar bed ne voe ket bet hon heni" (MERCI, 1921)

Ouzh taol edomp pevar paotr etre pemzek hag ugent vloaz, en un davarn war blasenn Itali e Paris. Plijadur hon doa en ur gaozeal, n'em eus ken soñj diwar betra. Diwezhat a-walc'h e oa dija pa erruas un den hanter-vezv, war-dro tregont vloaz anezhañ. En ul lonkañ e vanne gwin, e klevas ur yezh iskis, alamaneg marteze met brezhoneg e gwirionez. Tostaat a reas ouzh an daol ha kregiñ da soñjal a-vouezh-uhel. Hag unan ac'hanomp a grogas da c'hoarzhin ken krenñ, ken krenñ... Mennoziou an dud vezv n'int ket gwall-sklaer hag hon den a zeuas da vezañ fuloret-ruz.

- "Me zo ur para, emezañ, me zo bet unan eus ar re wellañ eus ma rejimant e kross-kombat. Mont a ran d'az lazhañ," emezañ d'am mignon. Siwazh hor mignon oa an hini moanañ ac'hanomp, hag en ur welout ur gontell etre daouarn an den mezv, ne oamp ket re fier.

Neuze, ur mennoz am eus bet :

- Chom peoc'h peogwir ne vo ket dezhañ, a lavariz d'an den mezv, en ur ziskouez va mignon, met din e vo ret ober ar pezh a blij dit, ha ne vo ket gwall aes!

- Petra a fell dit, emezañ, n'out ket kontant ?

- Nann, tamm ebet.

- Soñjal a rez bezañ kreñvoc'h egedon ?

- Eveljust, n'eo ket gwall-ziaes !

- M'em eus graet kross-kombat, emezañ.

- Se ne ra forzh!

- M'em eus graet judo.

- Se ne ra forzh!

- Petra ac'h eus graet te, beg-bleud ?

- Me zo gourener ha m'em eus bet ar maout evit Breizh.

- Te, ken yaouank !

- Gout ouzez lenn ? Neuze, lenn an dra-se ! "Digeriñ a ran ur gazetenn c'hall ma oa skrivet warni : LE MENN, CHAMPION DE LUTTE BRETONNE, hag ur pennad da heul...


- " Te eo ?

- "Eveljust" a lavariz en ur ziskouez ar gartenn a vez roet da bep-hini e ti-kêr e vro.

En ul lenn pep tra, dizvezvet eo bet an den, ha n'eo ket chomet pell en davarn goude bezañ pacet e chopinad gwin.

C'hoarzhet mat hon eus peogwir soudard Bro-C'Hall ne ouie ket ne oa nemet an anv-familh a oa heñvel, hag Erwan ne oa ket anv-badez an hini en doa bet ar maout er c'hourenadeg vreizhat.

ERWAN.



Ur chomlec'h da c'houzout :

Ronan JOLAIS - 40, rue de Bretagne - PARIS III<sup>e</sup>

Kasit ho lizhiri dezhañ ha N'ANKOUNAC'HAIT KET

KAS IVEZ P E N N A D O ù...

Skrivit e brezhoneg, par ma c'hellit, ar muiañ ma c'hellit... Savit pennadoù diwar-benn ho studioù, ho micher, an dud a anavezit, al lec'hioù hoc'h eus darempredet, ar beajoù hoc'h eus gwraet... Savit danevelloù, istorioù, barzhonegoù...

Skrivit E B R E Z H O N E G !

"Ec'hon-meurbet eo maeziou ar Gouzout..." (Meven MORDIERN)



(Prezegenn graet gant AbEnnez  
 en ALRAE - da geñver devezh  
 ar Vrezhonegerion - 31/3/63)

oooooooooooooooooooooooooooooooo

Daou beulvan ez eus da welout e Mendonn. An eil, gwraet dioutañ "Maen ar Manac'h" - un anv iskis evel ma welimp goude -roet gant tud dianav dezho talvoud ar maen pe roet a-ratozh-kaer evit lemel e ster digantañ - a zo lec'hiet e Penn-ar-Pont, nepell diouzh bourc'h Lok-Goal (Bro-Ereg) - 12 km bennak diouzh Alrae. E-gile "Kegel Bre-c'hed" a vez kavet en ur gourenez, ur pennadig hent a-raok kêriadenn ar Pleg. 2 km a zo etre an daou beulvan.

Ouzhpenn dezhañ bout gouestlet da Sz Brec'hed ar Gristenion ha nend eo anat deoc'h nemet doueez-vamm ar Gelted, testeniet el Lebhar N-a Gabhala, gant Boueedoniezh Iwerzhon (Kv. D'Arbois de Jubainville; Kentelioù war Hanez ha Lemnegezh ar Gelted - e galleg) - stumm ar peulvan-mañ a zo diforc'hek-krenn diouzh heni ar Manac'h. Ur c'helf eeun ha tec'hus a zo dezhañ, tra m'eo kizellet da vat heni Penn-ar-Pont a ziskouez splann kalc'h ur gour evel ma tisplegin deoc'h em frezegenn - hag evel m'hon eus gwelet n'eus ket pell (1). An toull a gaver warnañ en deus servijet hep mar da lidaberzhioù gant laezh.

Un dra anavezet eo talvoud revel (Sz. sexual) ar peulvanioù-mañ er Gevredigezh keltiek, diouzh ar Gravez hollzoueck hag an triad pe drinded indezeuropek (Gw. Georges DUMÉNIL, "Jupiter, Mars, Quirinus") Reizh a-walc'h eil dereziad an Drinded indezeuropek a zo ennañ Kadarned (lese nerzh-soudardel), ijinerezh, hag ivez Heol, mammenn ar frouc'husted hag ar yac'husted. Avaze e veizomp talvoud-dreist deskonni an Heol gant an Hengravezioù a hil europat pe get. Amañ e c'hellomp ober meneg eus kehelidigezh Baal, degaset e Roma gant an Impalaer, beleg ha deskoniad HELIOGABAL (218-222) a gomz deomp eus kalc'hliouriezh kravez an Heol a gavomp c'hoazh en hor grez gant LINGAM NORA an Nevedoù hindouek.

Daouad gourel-benel (pe gwregel) peulvanioù Mendonn a zo un dra anavezet er prederouriezh kenhanzel. Anavezet eo c'hoazh gant ar c'hevredadoù deskoniek dedarzhed dioute.

Evit displegañ lec'hiadur ha stummadur ar peulvanioù-arouezioù-mañ, comp da welout ur c'henstrollad aroueziek hag heoliek bennak.

Er framasonerezh skosek, da skouer, anavezet dre vras gant oberoù talvoudus-kenañ Lanza del Vasto; hervez ar framasonerezh-mañ, c teu o deskoniezh eus kevrinoù ELEUSIS e Bro-Hellaz, savet gant Kelted, gouez da skrivagnerion gozh (!). Gante enta, war dreuzoù an Neved, e kaver an daou beulvan a gomzomp war o divout (Kv. ivez dez-revelloù Leo TAXIL).

Peulvan an hanternoz, anvet "kolonenn B" a dalvez evit ar benel- ezh, stagell an deskidi eo, heñvel ouzh gwraez pe barezed a renk bout frouezhusaet gant ar c'halc'h heoliek.

Peulvan ar c'hreistez, anvet "kolonenn J" a zo arouez ar gourel- ezh, stagell ar beuzeskonidi, mistri ha keveiled.

War ar peulvanioù-mañ e vez gwelet greunadenn HIRAM, tisavour ar roue Salaun (Kv. ar Bibl), arouez lakaet ouzh lein ar golonenn da dalvezout evit an amdroc'h a ro da galc'h mabden e vent doueel hag e dalvoud istorel ( e m e z o... )

Goude hor bout denesaet peulvanioù Mendonn ouzh re ar Framaso

e kav doomp e vank un dra : en Neved skosek, hervez, ar peulvaniou  
kalc'hel - lec'hiet en Norz hag er Su - a ya d'ober un tric'horn, er  
penn anezhañ un arouez heoliek ha revok bihanoc'h - "Maen diven" ar  
Reter, ar "Maen du" e korollas HELIOGABAL dirazañ hag e kerzhas war-  
gil araozañ e straedoù Roma. Anavezout a reomp ment an Neved skosek,  
henn eo : al linenn Rcter-Kornog a zo ur wezh hanter / div wezh al  
linenn Norz-Su. Klaskomp enta, en hanternoz d'al linenn Lok-Goal-  
ar Pleg, lec'hiet Mervent-Biz.

Bez' ez eus ur maen bihanoc'h, hogen kalc'hel ivez, er Vouster,  
parrez Mendonn - an uhelder anezhañ troioù l m hanter. Gwezharall  
edo en e sav dirak chapel S. Wisant. Pa oa bet savet an hent bras  
( e 1923, m'am eus soñj reizh ), eo bet diskaret ha lakaet war c'hri  
zienn an hent m'emañ atav. Warnañ e kaver ivez an toull meneget da  
genver Maen ar Manac'h.

Gwiriekaet eo a-se hor goulakadur. Amañ, e Bro-Ereg, e oa ur grav-  
ez a'n heol - lidoù bras dezhi - ar sez anezhi e gwalarn kêrbenn vras  
ar Weneded.

Diogel eo hon eus amañ savadurioù ar Gelted, en eskemm d'ar vein-  
hir pe d'an taolioù-maen henhanzel bet savet a-raok donedigezh ar  
Gelted. War ar peulvaniou kalc'hel ez eus bet savet levrioù, dis -  
plegadennoù ha dezrevelloù ; menegomp amañ : Henri HUBERT "ar Gelted"  
ha DOPTIN "Dornlevr Henhanzel ar Gelted".

Meur a beulvan a-seurt-mañ a zo bet kavet gant Goulven MAZHEAS e  
taredad Gwengamp. Re arall a zo anavezot er Vro-Vigouden h. a....

Hogen, hep mar ebet, re Zouar Alrae, a zo ar re wellañ hag ar re  
vrasañ eus Breizh a-bezh, en hon amzer da vihanañ.

Evel ar veinhir - pe beulvaniou boutin n'eus nemet ur maen o vont  
da ober seurt savadurioù. Neoazh peulvan benel ar Pleg a zo warnañ  
ur penngorf kizellet. Er gravez keltiek reizhkredennel avat - a-raok  
aloubidigezh ar Romaned - ne veze ket savet delwennoù d'an doueoù.


Kounait c'hoarzhadennoù ar C'Halied dirak delwennoù neved Delf  
meneget e oberenn Titus-Livus. Kavout a ra deomp enta ez eo bet lakaet  
ar penngorf g o u e donedigezh ar Romaned.

Neuze e vizic chomet bev diwelet a-walc'h lidouriezh an Douez-  
vamm, e Bro-Ereg, e-pad an Dalc'hidigezh.

Evit a sell ouzh an trede maen a gaver war Gegel Brec'hed, e tle  
bout bet degaset amañ diouzh chapel Santez Brec'hed a gaver er gêr-  
iadenn nesañ.

Menegomp d'an diwez, ez eus un eienenn sakr er Pleg, e-kichen ar  
chapel enaomp o paouez komz war he divout.

ALRAE, 31 a Vourzh 63.



KRENNLAVARIOÙ AN AMZER

P'arru gouel Sant Jili / 1/9 / Glav hag avel tro-ha-tro d'an ti.	P'erru sul bras ar Rozer(a) Ez a merenn-enderf d'ar gêr.
P'arru ar gouelioù / 1 ha 2/11 / Ez a an devezh d'ober daou.	P'erru gouel Sant Jili c'hi. Ez a merenn-enderf e revr ar
Kalafn-gouañv (=miz Du)mammenn en dour Ma ne vez ket, e vimp paour.	P'arru gouel S. Beuzhi / 24/11 /
P'arru gouel S. Andraz (Andrev) Hadet tev, aret bras.	E-lec'h ur gran eo ret lakaat Miz an Azvent (=kerzu)
Tostaat a ra ar gouañv, Emañ ar chas-koad oc'h harzhal.	Nav bleiz en ur vandom Troit ho kein ha kit gant ho hent

gant Erwan KERVELLA

Setu ! ... Kroget eo ar skol ...

Savet abred-mat, holl vugale Landibido a zo degouezhet er c'hlas. Ya... Holl vugale Landibido a zo aze : Bernarz Sivilised, Yann Chikolodenn, Erwan Kerstoupig, Pêr Kerchapel ha me 'oar-me ... Zoken emañ er c'hlas Ivonig Kerankoù, lesanvet Loustig; ya, an holl a zo souezhet rak ar bloaz a-raok ne rae nemet skol-louarn hag e vamm he doa lavaret ne yafe mui d'ar skol.

Ar skolaer a oa o c'houleñn o anvioù digant ar vugale :

- Piv a grog e anv dre C, emañ ?
- Me, eme Yann Chikolodenn.
- Mat, goc'h anv bihan ?
- Yann.
- An hini bras ?
- Chikolodenn.
- Deiz ha bloaz ho kanedigezh ?
- Naontek a viz Meurzh mil nav c'hant nav ha daou-

ugent.

- Micher ho tad ?
- Ober war-dro sivi, piz, konkombrez ...
- Mat ! Pet bugel er familh ?
- Me ha div c'hoar.
- Mat-tre. Azezit.

Prestik e tegouezh ar skolaer e K. Loustig a sav e viz.

- Hoc'h anv bihan ?
- Loustig.
- N'eo ket al lesanv a c'houleñnan. An anv gwir.
- 'velep hini 'vel va faeron : Ivonig.
- Ha... mat. Hoc'h anv bras bremañ ?
- Memes hini 'vel hini va zad, va zad-kozh, va zad-

kuñv ha va zad-you.

- Lavarit hoc'h anv ha buan !
- War bez va zad-kozh eo skrivet, Aotrou !
- Na rit ket goap ouzh an dud, mar plij.

Ar c'hlas a-bezh a c'hoarzhé gant respontoù Loustig.

- Mat, eme Loustig, Kerankoù.
- Hi, Hi ! eme ar skolaer. Humm ! mat. Deiz ho kan-

edigezh ?

- N'ouzon ket me, unan eus devezhioù ar sizhun sur

a-walc'h.

- 'm eus ket goulennet an dra-se. Goulennet em eus an dra-mañ : an deiziad, ar c'hentañ da skouer, ar miz hag ar bloaz. Komprenet ?

- Eus klevet va mamm ez on ganet tri devezh goude m'en doa va zad gounezet ar c'henstrivadeg bouloù. An dra-se a oa goude an eost. Ha me zo pevar bloaz koshoc'h eget "Charlig" a zo koshañ pemoc'h ar vereuri ha ...

- Met goap a rit ouzh an dud, c'hwi ?

- Me oar bloaz e c'hanedigezh, eme Bernarz Sivilised, mab ar maer : unan ha tregont a viz Eost naontek kant hanterkant.

- Mat-tre. Petra 'ra ho tad ?  
 - Boueta saout, moc'h, kezeg; treiñ 'n douar, plantañ  
 pe hadañ traou e-barzh. Ouzhpenn e kri war Mammig hag e vazhata  
 ac'hanon.

- Met eus pe lec'h e teu an ibil-mañ...  
 - Me a zeu eus ar gêr eveljust.

Hag e-pad an amzer-se, ar c'hlas a-bezh a c'hoarzhe hag a c'hoarzhe.  
 Dont a rae an dour war daoulagad ar vugale.

- Mat, eme ar skolaer en doa c'hoant echuiñ gant an dra-  
 se. Pet bugel a zo er familh ?

- Seizh warn-ugent, eme Loustig. Ya, ya, gant bugale va  
 zintined ha...

- Mat, met er gêr du-se, pet a zo ?

- Trizek.

- Petra ?

- Ya, ya, trizek, peogwir daou eus va zontoned a zo o  
 chom ganeomp.

- Mat, met bez' ez eus da dad, da vamm, te hag...

- Loullig ar c'hi ha Bisig ar c'hazh.

Ar skolaer drouk ennañ, ruz, e zaoulagad er-mac'h eus e fas, e c'hen-  
 ou a-dreuz a grias :

- Azez it buan !

- Ouf ! eme Loustig, en ur azezañ war ar bank.

- Ouf ! eme ar skolaer. Kendalc'homp.

Hag ar c'hlas a c'hoarzhe, a c'hoarzhe, a c'hoarzhe ...

Tual ar YOURC'H

14 vloaz.

L. 26 a viz Gwengolo 1963.

DIC'HOARZH pe FENTUS

Ur wezh, Pozed, ur rener c'hoariva brudet-mat, a voe skouarnata-  
 et e-kerzh un ta but. Manet difrom, e c'houlennas :

- Daoust ha dic'hoarzh pe fentus eo an doare ganeoc'h ?

- Dic'hoarzh diouzh reizh, a c'hinas e-gile droug ennañ.

- Neuze, mat eo, un taol kaer eo deoc'h, eme Pozed en e boz. Rak  
 n'on ket evit lezel ober seurt traou.

Pozed, ur rener anezhañ, a c'helle bezañ taer. Un dremmour a eve  
 en tu-hont d'ar sec'hed na oa ket evit c'hoari. Ur wezh ma teuas de-  
 zhañ bezañ mezv adarre, Pozed e skarzhas kuit goud'e an arvest. Monet  
 a reas kuit, rannet e galon. Glav a rae hag e teuas en-dro da gerc'h-  
 at e zisklavier, disoñjet gantañ. Pozed o tiskouez an nor dezhañ a  
 lavaras ken dichek ha tra :

- Kaset e vo deoc'h ho tisklavier!

DISFIZIANS

En ul leti (=ostaleri) ez a Yann evit tremen an noz.

- Petra hoc'h eus aze, a c'houlenn ar mestr.

Ha Yann da zisplegañ :

- Gwiberou eo! Bepred emaint ganin paz an en ul leti. Mar befe  
 un tangwall e-pad an noz e c'hellfen lammat diarvar dreist ar prenest  
 zoken diouzh an dekvet solier. Un dra vat!

- Moarvat, a anzav al letiour. Hogen gant ar penefi-se e rankit  
 reiñ arc'hant raktal. GWION. (diwar ar germaneg)



W A R U R B E Z ...

E koun an holl Vreizhiz  
aet trema Doue.

"Galvomp warno truez Doue,  
An Doue zo bet e gorf malet a daoliou  
garv  
En deus kousket div noz e gwele yen  
ar marv  
Evit sevel ul lec'h, e Peuc'h e  
garantez  
D'ar re-mañ..." (Lociz HERRIEU)

-----

O prederiañ emañ war ur bez.  
Marv eo an deiz all.  
Eman emañ bremañ ?  
Nijet en deus e ene trema an Nefv  
douget gant an Aeled  
Hag e prederian war e vez ...

Tud zo a brezeg evel-henn  
N'eus netra en tu all !  
Hag em c'hreiz e soñjan  
Perak en deus bevet neuze  
Hennezh hon eus kollet  
Hag e prederian war e vez ...

Ha me a venn lavarout  
D'ar re o deus e-giz-se soñjoù fall  
Goude ar marv ez eus ar vuhez  
Ar vuhez peurbadus  
roet d'an heni tremenet  
Hag e prederian war e vez ...

Gwelloc'h e vehe din ar marv eget ar vuhez  
Ma vehe ar wirionez gant an dud fall  
Ha me gemerhe raktal an hent-se  
Gant ma echuo va buhez  
Hogen dirak ar bed a-bezh  
Ha dirak ar bed-mañ  
Me a vann va feiz e Doue  
Va feiz er vuhez treamzerel  
Va goanag er Baradoz  
Va goan ag dre c'hrad Doue  
Va c'harantez e-keñver an dud  
Melezour karantez an Hollbaduz.

A b E n n e z.

15 C'Hwevrer 1961,  
Merc'her al Ludu ;  
E koun un amezeg marv...

G O L a zo bet savet a-ratre evit ho listri-kegin gant KOGON, arbennigerezh ar c'hroc'hen. Gant GOL e vano flour ha boulc'h ho taouarn.

G O L a zistrujen un taol an druzoni. Gant e eon, e c'hellit disgwalc'hiñ buan al listri.

G O L a zo espar : pouezit war stouf ar jarlig-plastik ha kementadit...

G O L : savet gant KOGON e Breizh.

E gwerzh e ti ho marc'hadour boutin.

GOL ! GOL ! GOL !  
Ne vin ket koll !!!



Ar spispledour LAEUVON a ginnig deoc'h :

- BOESTADOù6LAEZH "LAEUVON-SUNK", "LAEUVON-DISUNK", "LAEUVON-VUGEL", "LAEUVON-YOD"... hervez hoc'h ezhommoù...

LAEUVON en deus oberiet nevez zo evidoc'h :

- an amanenn "LAEUVON", dre hollen ha hanter-hollen (an ti LAEUVON, hervez ar c'hiz e Breizh, abaoe lekan-tvedoù, ne ra ket amanenn hep hollen);

- keuz "LAEUVON" dre laezh buoc'h;

- goulennit ivez "foulondeg LAEUVON" dre laezh-gavr;

- kaouledoù, gwelvoù, yoc'h-out, h. a.


E ti ho temzdiout e kavet an holl varc'hadourezhioù-se; n'ankounac'hait ket an anv :

LAEUVON - oberiet e Breizh.

GWLESTRI GWLAR

gwarantet 4 vloaz -  
gwlestri evit un den pe zaou -



gwlestr  
boutin



c'hweltaol  
boutin



gwlestr  
gwele



TOAZ-dent dreist

dent gwenn-kann  
habask alan !

Evonus-dreist, HAB a lam diouzh ho tent kement tra a ro un anal fall ha dihabask, a lez er geno ur freskter espar hag a ro o sked gwirion d'ho tent. N'ankouait ket ober gant ar vroust HAB a-ratozh evit an dent kizidik...

Un TOAZ-DENT DREIST evit kement heni... dre galkion, dre c'hlaz-deil, dre dreluc'hat...

Un TOAZ-DENT DREIST evit  
H O T E N T !

Oberiet gant :  
SAFERIGOUR  
156-157, bali Wereg - ALRAE

G E R I O ù - K R O A Z

g a n t L U S I A N R A O U L.

Respont an niverenn diwezhañ :

- A-LED : I.- Meurlarjez  
 II.- Heol - ro  
 III.- Adenaou - Go  
 IV.- Nil - nein  
 V.- adster - orn  
 VI.- rokedenn  
 VII.- Drouin - ere  
 VIII.- Ruz - kened  
 IX.- Tue - on  
 X.- Isrenerien.

- A-SERZH : 1.- Moanard - ti  
 2.- Didorrus  
 3.- Uhelskouer  
 4.- Ren - teuz  
 5.- Loa - edi - an  
 6.- Alo - renk  
 7.- Un - eor  
 8.- JR - eonenniñ  
 9.- Eogiñ - re  
 10.- Onn - edon.

Kudenn nevez : Alienn : C'H ne dalvez nemet evit ul lizherenn met CH ha ZH a dalvez evit div.

	a	b	k	d	e	t	g	h	ch
I									
II									
III									
IV									
V									
VI									
VII									
VIII									
IX									
X									

- A-LED : I.- A laka al laer da doc'hout kuit.  
 II.- Verb, leun a zoujañs. Doare lenn.  
 III.- Ijinet gant ar Gac'herion-graofñ (komprenit Sinaiz !) war al lavarerc.  
 IV.- Laka unan pa ri ti - stumm all cus va - en e saozneg.  
 V.- loened a blij dezho kousket.  
 VI.- Ur seurt riboul - gourc'hemenn evit mont - bouch a lavarerc a-wezhoù.  
 VII.- Kontrol eus ZEU - A gaver war vord ar mor.  
 VIII.- Ger-mell - A lavarerc dirak un

dra heugus - evezhiak.

- IX.- Dianav d'ar Vretoned ma kreder Parizianiz - un divlizherenn.  
 IX.- Stumm eus gober - Santez karet gant ar Vretoned.

- A-SERZH : 1.- Warnañ e weler a-wezhoù ur marc'h du.  
 2.- En arme emañ war-raok.  
 3.- "Enez ar..." romant gant Z. de LANGLEIZ.- Vioù laou - Pa vez muioc'h eget ret.  
 4.- A fenne - Dibenn verb.  
 5.- Deroù an devezh emamp o vevañ. - Laboused - O anv a zo bet roet d'ur Vreizhadez anavezet anavezet evit he sotoni.  
 6.- Brud mat - vogalenn.  
 7.- Dañvadig - dibenn-ger o talvezout "pezh a zo e-barzh".  
 8.- Oabl - a-istribilh.  
 9.- Stagadenn-nac'hañ - skeudenn ur fals-doue.  
 10.- Ger nac'hañ alamanek - Kontrol eus "mont war-raok".

KRENNLAVARIOÙ

E oa o klask e varc'h hag e oa war e gein.  
 E oa o klask e azen hag e oa warnañ.  
 E oan o klask va c'horn hag e oa em beg.  
 Mab an tad eo hennezh.  
 Mab ar vamm eo honnezh.

N'eus ket a c'hoari  
 Gant ur c'hozh ki  
 Bezet du, bezet gwam  
 Pep gavr a gar he mam

warni gant lizherennoù ruz "Voyant extra-lucide" (e galleg e oa).  
Goude ur vunutenn em eus klevet : "Piv a zo aze ?"...

Lenner, dit-te e komzan. Marteze e teu soñj dit ez on foll da stagañ. Aze emañ a n dalc'h. Ret eo gouzout piv a zo klañv, ar skrivagner pe al lenner. Alies e soñjer eo ar skrivagner un den klañv hag al lenner ur mignon deuet da reiñ un tamm frealz dezhañ en ul lenn e levr. Met a-wezhoù e vez lavaret eo ar skrivagner un den kaset gant Douc da frealziñ poanioù diniver ar bed. Neuze piv a zo klañv ? An daou, d'am soñj. N'eus forzh penaos, c'hwi lennerion a zo klañv bras en ur glask kompren ar bennoberenn emac'h o lenn.

Ur gudenn a chom araok kregiñ gant va levr. Da biv e vo kinniget ul levr a zo ken brudet ? Soñjet em eus skrivañ : "D'ar Genvreurezh Denel" met ar genvreurezh a zo ur mennoz touellus barrek da ges da foll ar merc'hedigoù o c'halonoù kizidik ha netra ken. Rak en ur welout an denelezh e vez gwelet diouzhtu eo graet a hiniennoù goloet a lorc'h ha n'eus kenvreurezh ebet.

Ma soñjit ez on un tamm-peñse o damneual war ur mor a holl-arvarerezh e vin gla c'haret. O! ne ouelin ket. N'ouzon ket gouelañ rak dimezet on gant ar glac'har.

Va bizied a ya da vezañ divuhezek p'emaon o soñjal emac'h ouzh va barn. Ai! drouk ma'z oc'h! Ur gouli gwadus hoc'h eus graet em c'halon dener (a zo gwenn war un tu ha du war e-gile) gant ho c'hoarzhadennoù gnapaus. Gwell e vefe deoc'h, kristonien, paouez gant ho c'hoarzh. Poan am eus em c'halon. Re vras poan eo evit bezañ bet graet ganeoc'h a-ratozh-kaer. Met bezomp madelezhus en ho keñver. Krelomp eo echu gant va gouli (ha ne vo ket araok pell amzer). Setu echu eo. Parcet on. Ha me en em gav adc'hanet d'ar vuhez unton gant an dud sec'h o c'halonoù.

Chañs hoc'h eus n'on ket lorc'hus. Bewezh ma teu din ur soñj a lorc'h e tufan anezhañ gant va disme gañs.

Pa soñjan eo ret skrivañ ez on fuloret. Met ret eo din kinnig d'ar bed a-bezh ur frouezhenn ken talvoudus. Ar frazenn-mañ a ya gant in evel pa vije bet lavaret "An avaloù-douar a zo mat da zebriñ".

Ar sec'hed a zeu din. C'Hoant am eus evañ ur banne met unan am eus evet dija hag unan muioc'h ne blijfe ket d'al lennerien, setu perak emañ o vont da lonkañ ur banne, met hep hel lavarout dezho.

.....

Ur banne fresk a laka an den da vezañ evurus. Kalz muioc'h eget ne vefe graet o lenn skrivagnerien zo, p' emaint o skrivañ sot-onioù evel... evel... N'ouzon ket petra... Hag eo... Un istor evel honnezh. An douar. O redek war an douar daou loen. Unan a red warlerc'h e-gile evit hel lazhañ. Pep hini anezho en deus ur voutailhad louzoù. Pep hini d'e dro a ev ur banne, a gresk, a ya buanoc'h. Hag an douar a ya da vezañ bihan-bihanoc'h en oc'heñver. Erfin ne chom mui a blas. Pep hini en deus e fri "war ler" e-gile. Petra a c'hoarvezo ? Netra rak ne chom mui a louzoù... Aze e vez klevet ul laz-seniñ iskis. N'eus benveg ebet. N'eus nemet tud o c'hoarzhin. C'hoarzhadennoù a bep seurt, uhel, izel, sot, speredek ha me oar... Laz-seniñ ur vuhez... ncketa !

N'em eus c'hoarzhed gant plijadur nemet ur wezh em buhez o welout an Ankoù o lakaat ar Vuhez da goroll.

Iskis ar vuhez!

! uti nq ur jem uatiks oo tos

Met perak e lennit war an tu mat ?

Perak ? Posupl eo lavarout perak evit ur bern traou. Da skouer p'emañ gwazed a-gevret. Petra 'reont. En em selaou an eil hag e-gile. P'emañ merc'hed a-gevret? Sellout an eil ouzh he-ben. Perak ?... Iskis ar vuhez, setu perak... perak... perak...

Iskis ar vuhez a lavaran. N'eo ket bet kavet ar frazenn-se gan-in-me. Met daoust ha n'eo ket nevez-flamm e ra brav hel lavarout. Ur wezh...

N'on ket evit echuiñ va raklavar rak n'em eus ket soñj eus deroù anzhañ... Neuze plas d'an oberenn.

NEUZE PLAS D'AN OBERENNN...

AN

D I A N A V

D I Z A N V

gant O W E N G L E N

(War ar bajenn gentañ :) )

Roll an dud speredek hervez Owen GLEN :  
Owen GLEN

(E traoñ ar bajenn eo skrivet:)

Roll da beurleuniañ.

'War an eil bajenn :) )

Lennerien ker,

N'on ket deuet a-benn da sevel va levr. Va digarezh... Rak-se emañ o vont d'en em lazhañ. Goude kalz a brederiademoù ar spered uhel hag ijinus-dreist a zo ac'hanon en deus diba bet evit en em lazhañ an doare-mañ : en em veuziñ er Misisipi. Stêrioù Breizh a zo re vihan evidon.

Ra vezin moulet : Ur c'holl  
bras e vo evit  
ar bed.

Graet ar : b r e m a ñ.


N'eus mui....siwazh....siwazh....siwazh.....

Notenn ar mouler : Marv eo. Doue d'e bardono !

D'e interamant ne oa den ebet. Paourkazh Owen Glen. En em lakact en deus a-us d'ar re all kement m'en deus ankounac'haet sachañ dezhañ karan-tez ar re all.

AR CHARLES,

NEMETAÑ.



BREIZ →



- KAVET AM EUS UN HARP!

" Ret hen anzav, faziañ a ra an den speredekañ, pa fell dezhañ fiziout war e vennoziou-sñ ha war sklerijenn e spered e marc'hadou an denelezh."

MARICHAL FOCH, 1928

Ar paotrig bihan o c'houlennata e dad.

- Tata, ha savetaet eo bet Bro G'hall gant Janed Ark ?
- Ya mabig.
- Tata, ha savetaet eo bet Bro G'hall gant Charles De Gaulle ?
- Ya mabig.
- Tata, ha bet eo devet Janed Ark ?
- Ya va mab.
- Tata, perak n'eo ket bet devet De Gaulle neuze ?

Herve Konan.

KUDENNOU

I- Ur c'houer a ya d'ar marc'had gant ur banerad viou.  
a) d'an den kentañ e werzh an  $\frac{1}{2}$  eus e viou hag un  $\frac{1}{2}$  vi;  
b) d'an eil den e werzh an  $\frac{1}{2}$  eus ar pezh a van hag un  $\frac{1}{2}$  vi;  
c) d'an hini diwezhañ e werzh  $\frac{1}{2}$  eus ar peurrest hag an hanter vi diwezhañ. (an holl draou se hep terrin ur vi.)  
Pet vi en devoa ar c'houer?

II- Tri den a ya da glask ur gambr hag e vez goulennet 30 lur (10 skoed) diganto gant paotr ar gambr. Diwezhatoc'h ar perc'henn a lavar d'ar paotr en devoa goulennet 5 lur (20 real) re. Ar paotr avat na ouie ket kontañervat. Rentañ a reas 1 lur (4 real) da bep den hag e viras 2 lur (8 real).  
Da lavarout eo, bez o devoa peaset 9 lur (3 skoed) pep hini, pe 27 lur (9 skoed) evito o zri.  
27 lur ha 2 lur miret gant ar paotr a ra 29 lur.

5 pelec'h ez eo chomet al lur diwezhañ?

\_\_\_\_\_

III

Gant peder linenn eeun, hep sevel ho pluenn,  
tremenit war bep hini eus ar merkod man.

\_\_\_\_\_

En ur dremenn dirak un ostaleri e welas ur paotr:

AMAN E KAVFET PEP SEURT KIG

Hag en da vont tre ha goulenn digant ar plac'h ur "sandwich" olifant. Ar plac'h a yeas d'ar gegin. Distrein a reas un toullad eilennoù goude-se ha lavarout a reas:

"Hon digarezit n'hellomp ket rein ur sandwich kig olifant deoc'h."  
Hag en souezhet da lavarout d'ar plac'h e vefe dleet d'ar perc'henn tennan e skritell.

"Oh, "emezi, "n'eo ket kig olifant hon eus diouer anezhan met n'hon eus ket bara awalc'h."

\_\_\_\_\_

Ar paotr a berras e c'hoarvezhañ  
Tata, ha savet eo bet Bro Gwalh gant Janed Ark ?  
Ya madiganonK evreH  
Tata, ha savet eo bet Bro Gwalh gant Charles De Gaulle ?  
Ya madig.  
ar respontou.  
Tata, ha savet eo bet Bro Gwalh gant Charles De Gaulle ?  
Tata, ha savet eo bet Bro Gwalh gant Charles De Gaulle ?  
(I- sevel al